




NIVERENN 110



STUDI HAG OBER

DASTUMADENN DRIMIZIEK

RENERIEEN :

Ao. beleg Loeiz ar FLOC'H,
Kelenner e Skolaj S^t Josef, Lamuon,
(breman dindan an armou) .

an Ao. Y.P. Nedeleg, kelenner e
Kloerdi bras Kemper
(breman dindan an armou)

Kas ar skridou hiviziken d'an Ao.
Bourdellès institution S^t Joseph —
Lannion, hag an arc'hant da gont-
chek an **eo. Nedeleg : Abbé Nedelec,**
Séminaire de Quimper, C.c. : 193-17-
Nantes.

Priz ar c'houmanant bloaz, (4 ni-
verenn) a zo 10 lur.

—ooo—

STUDI HAG OBER a zalc'h, daoust
d'ar gwall-amzer a vevomp breman.
Youl bras he renerien eo, hag hini
he leennerien ivez !

D'ar re man d'hor skoazella !
Bennoz Doue d'eoc'h ha dalc'homp
start atao !

KELENNADUREZ EEUN diwarbenn ar c'hras-santelaat

Doue a chom ennomp.

Sant Yann-Vadezour o komz eus Jezuz, a lavare d'ar
Judevien « Beza 'z eus unan en ho touez ha n'avezit
ket anezañ. « Kement-all a c'hellomp lavarout ivez :
« Beza 'z eus unan en hon touez ha n'avezomp ket
anezañ. N'eo ket eus hon Salver Jezuz Krist o chom
ganimp e sakramant an Aoter e fell d'in komz. A dra
sur, mar anavezfemp, mar karfemp muioc'h hon Salver
e teufemp aliesoc'h d'hen degemer er gomunion. Met
beza 'z eus unan all, hag a zo o chom en hon touez, en
hon c'hichen, petra lavaran, ennomp evit gwir, ha n'a-
navezomp ket anezañ. Ne soñjomp ket ennañ. Labourat
a reomp, beva a reomp, evel ma ne vije ket heñ ennomp ;
e zougen a reomp en hon c'halonou ha ne reomp van
outañ. Hennez, eo an Aotrou Doue a zo o chom ennomp
dre ar c'hras.

Ar vugale hag o zud en em wel alies ; beva 'reont
war eun dro, er memes ti. Ni a zo bugale da Zoue.
Hon ti eo ar Baradoz ; eun deiz ez aimp da welout eno
hon Tad, evit beza gantañ, ha karout anezañ. An Aotrou
Doue neuze en em roio d'imp e-unan, da veza ma-
gadurez hon spered, da veza hon buhez, hon eurusted.

— 1 —

Met en e vadelez dreist muzul, n'en deus ket an Aotrou Doue gortozet ar Baradoz evit en em rei d'imp da vagadurez hon spered ha da levenez hon c'halonou. Adalek an douar-mañ, en deus teurvezet diskenn betek an tamm pri a zo ac'hanomp, betek ar grouadurien dister a zo ac'hanomp, evit ober e chomaj ennomp, evit ober gant hon ene, e balez.

Pa vez digoret eur prenestr, e teu sklerijenn an heol en ti ; pa vez digoret dor hon ene dre ar c'hras, e teu sklerijenn an Aotrou Doue ennomp : « Va flijadur, eme an Aotrou Doue, eo beza o chom e-touez bugale an dud », da lavarout eo en o c'halonou. Ma 'z eus unan bennak hag a gar ac'hanoun, eme Jezuz, va zad a garo anezañ, hag e teuimp d'e gavout, hag e raimp hon chomaj ennañ. » Sant Paol c'hoaz a lavare d'ar gristenien genta : « N'ouzoc'h ket eta ez oc'h templ an Aotrou Doue, hag emañ ar Spered Santel o chom ennoc'h ? Ho korf a zo templ ar Spered Santel. « Setu aze an enor dispar a zo bet graet d'imp gant an aotrou Doue. N'eo ket bet tra 'walc'h gantañ rei d'imp e vennoziou, hon c'hemer da vugale ; deuet eo e-unan betek ennomp, d'en em rei d'imp, da veva e kreiz hon eneu. »

Sant Pêr war ar menez Tabor o welout gloar Jezuz, a lavaras « Aotrou, mar karit e savimp teir deltenn, unan evidoc'h, unan evit Moizez hag eun all evit Eliaz ». Brao e oa da Sant Pêr gwelout gloar, splannder Jezuz. Kalz bravoc'h eo d'imp kavout ennomp gloar, splannder an Dreinded santel dre ar c'hras-santelaat. Evel ma kavomp alies e kantik ar Baradoz, kaera kantik a zo bet savet biskoaz gant an dud, kantik ken dous ma teu an daerou en ho daoulagad :

Jezuz, pegen bras 'vez plijadur an ene

Pa vev e gras Doue hag en e garantez.

Ya, emañ Doue o chom en hon c'halonou hag heñ leun a zouster hag a vadelez. Evel eur bugelig bitian en e gavel omp luskellet gant karantez an Aotrou Doue.

Lavarit d'in ha diaes eo beza eur sant? An Aotrou Doue a zeu ennomp evit hon santelaat muioc'h mui ; dont a ra da rei d'imp e nerz hag e c'halloud evit stourm ouz kement a c'hellfe hon dispartia dioutañ. Pa 'z omp ken tost d'ar feunteun, da vammenn ar vuhez, digoromp frank hon c'halonou evit eva an dour a garantez, a furnez hag a santez. An Aotrou Doue a zo prest da rei d'imp kement a c'houlennimp digantañ : « Daoust hag heñ e c'hell eur vamm ankounac'haat ha dilezel he bugel? eme an Aotrou Doue, ha pa zegouezfe ganti hen ober, me avat, n'ankounac'hin ket va bugaligou ». Diouz hon tu neuze, greomp kement hag a c'hellimp evit diskouez hon c'harantez d'hon Doue.

Da genta, diwallomp diouz ar pec'hed marvel. Rak siouaz, gant eur pec'hed marvel hepken e vez argaset, bountet an aotrou Doue ermaez eus hon ene. Penaos e c'hellfemp dilezel an hini a zo hon Tad, evit eun tamm plijadur dister a lez war he lerc'h, blaz c'houero ar velkoni, an dristidigez, ar c'heuz. Met n'eo ket awalc'h. Alies, sonjomp ennañ, lavaromp d'ezañ hon c'harantez, pedomp anezañ : « Ro d'in da galon, va mab, eme Doue d'hon ene, komz ouzin rak dous eo da vouez ». El labour, er boan koulz hag er joa, sonjomp ez omp tost da Zoue : Ar bleuñv a zo savet war an douar, deut eo an amzer a levenez, eme c'hoaz an aotrou Doue ». Ya, pa vevomp er stad a c'hras, pep tra a zo kaer evidomp, hon poaniou, hon labouriou, hon oberou, hon pedeniou. Rak pa zeuio evidomp an eur da vont davet hon tad, pa gouezo ar ouel a zo breman c'hoaz etrezomp hag an Aotrou Doue, e vezimp souezet o welout pegen tost e oamp d'Ezan, pegen tost e oamp d'ar Baradoz, hag o welout pegen kaer eo an Aotrou Doue hon Tad, e vezimp karget gantan a levenez .

Meurded ha reuzeudigez

hor arz kristen breton

NOTENN AR RENEREZ.— *Daoust d'hon c'henlabourer beza garo a-wechou, ha kas dichak o flad d'an dud da li-pat, ez eus re a wirionez da denna diouz e gomzou e-vit tremen hep e selaou.*

E-pad an ehan-skol, e plij d'in mont da vale dre ar vro evit komz brezoneg gant an dud ha kustumi va diousskouarn diouz an doareou-komz an dishañvala, hag ivez evit arvesti ouz kaerderiou hon arz broadel, hon ilizou. Amañ, n'hon eus ket evel e Bro-Flandrez, tiez-kêr pinvidik, kreizennou kompagnuneziou-kenwerz lor-c'hus ha pompadus ; amañ eo bet bleuniet ar vuhez en eun iliz, en eur chapel, eur c'halvar, eur feunteun. Petra o deus lezet d'imp ar c'hêriou bras nemet eur c'has-tell-kreñv bennak, eun iliz-veur hanval awalc'h ouz re an Normandi pe ar Poatou ? Nemet e-kreiz hon maeziou eo bet bleuniet an arz hervez hon spered hag hon c'halon.

Koulskoude, lies awalc'h, e kichen an dudi e kaver an dizudi. N'eus ket eur bloavez c'hoaz e tegouezen a-gevret gant daou vignon en eur barroz, kaer hec'h iliz e-touez ar re gaera e Breiz a-bez, ha goude beza sellet ouz an diavaez miret dinamm a-hed ar bloaveziou, e oamp bet kerseet gant an diabarziou mastaret gant gwer fall, pe skeudennou divalo ; pa gavjomp an aotrou Person a oa e-unan o vont d'an iliz.

Gant hegarated e c'houlennas diganimp, hag en em lakaas da ziskouez d'imp e binvidigeziou. Gwelout a re-

jomp dioustu ne oamp ket tuet da gavout talvoudegez gant an hevelep traou hag heñ : daoust d'ar pez a lavare, e oa brao meurbet e stern-aoter, e koad kizellet, livet hag alaouret, eul labour eus ar seitekvet pe driouec'hvet kantved. «Koz eun tammig, eo deuet da veza», emezañ.

Ha ni d'ober tro ar pilherou : « Setu amañ, eme an aotrou Person, eur skeudenn (delwenn) gaer eus santez Mari Alacoque. Eun all a oa bet kinniget d'in gant eur barrozianez devot, o tiskouez ar santez en he sav, an hini a welit aze eun tammig izeloc'h. Met kavet em eus gwell kaout ivez unan daoulinet am eus prenet ; koustet ker eo bet d'in rak unan vras eo evel ma welit ». — « Ya, unan vras eo », emezoun. Eur pezh-hini e oa, ment ar beo ganti, harpet ouz eur pilher a yae da dreut en he c'hichen. Bihan e oa kentoc'h an iliz, ha pep tra skañv enni.

Ha koun am boa eus eun delwenn all eus Santez Bernadetta, graet gant Savina eus Landreger, e koad, de-reat a stumm hag a vent, ha n'hellen ket mirout a soñjal e vije bet gwelloc'h hag evitt braventez an iliz hag evit yalc'h ar person kaout eur santez c'hoar da hounnez.

Diou skeudenn eus an hevelep santez : gallout a reer ober kalz gwelloc'h c'hoaz. N'eus ket gwall-bellou e oa en eur barroz e-kichen du-mañ, eun den a volontezevat (Doue d'e bardono), en doa gallet lakaat en e iliz, war eun dro, betek unnek delwenn eus ar Werc'hez Vari. Koulskoude n'en doa ket gallet chouka muioc'h. Ahendall, n'oun ket sur ha n'en dije ket graet.

Furoc'h e oa hon tud koz pa brent skeudennou. Dibaot a-walc'h ar reou vras graet ganto, ar reou vras re gorfek, re zanvezek, re bounner d'al lagad. N'ouzon ket penaos e c'heller kavout soñjou neñvel hag askellek dirak seurt tilzennouk plastr, evel ma weler a-wechou. Hon delwennou koz ez eus stumm enno, nerz. Gant dizampartiz a-wechou, met gant kalon bepred e klaskont diskouez eur soñj. N'int ket holl, evel dres, penno-

berou : traou c'houtet da vat ez eus ivez en o zouez. Met eul lodenn vras anezo ez eus enno eur vuhez dispar : eun dalvoudegez wirion o deus e keñver an arz, hag e kenver ar spered kristen, ha setu perak e plij d'an embannerien-levriou ober ganto da gaeraat o labouriou. Morse ne zeufe soñj d'unan bennak da luc'hskeudenni delwennou stumm Sant Sulpiz a welomp bremañ er vro, evit kaeraat eul levr ganto. Dereat eo ar re wella eus ar plastrachou, zoken e c'hellont plijout kañz d'ar gwragez koz en abeg d'o liviou tener ; ar pezh avat a vank d'ezo, ar pezh n'hellont ket rei d'ar re a sell outo, eo ar spered, nij nerzus ar spered. Chom a reont douarel, flask. Klask a reont re, marmouza doare ar beo, ha setu perak ne santer enno nemet eur vuhez faoz. N'int ket da genta savaduriou ar spered, skeudennou soñjou eun ene, skeudennou lusk eur galon, ha setu perak ne dalvezont mann ebet, setu perak e kavan anezo trist.

Marteze an trista n'eo ket gwelout marc'hadourien o klask gwerza ker o flastrachou didalvoud, marteze an trista eo o gwelout degemeret ha prenet. Koulskoude hon eus er vro arzourien yaouank, kristenien hag a c'hellfe sevel labouriou eus an dibab e pep keñver : anavezout a ran hiniennou ha ne c'hortozont nemet labour diganimp. E lec'h dispign hon arc'hant o prena diou zelwenn didalvoud, e kav d'in hon eus an dever da lakaat da labourat arzourien eus ar vro, evit o mad hag hini hon ilizou, evel m'o deus graet personed koz Breiz, eun dever hon eus e-keñver hon bro.

GWAZGWENN.

NOTENN.— Kement hini en dije c'hoant kaout aliou diwarbenn an dra-mañ-tra, anavout anioù pe chomlec'hioù an arzourien vretien yaouank, n'o deus nemet goulenn diganimp.

Pedenn



da santez anna

M'hoc'h ador, va Doue, ha d'eoc'h-c'houi e kasañ
Eus a greiz va c'halon va bennoz ar c'hbuekañ
'Vit beza enoret ha savet ken uhel
Hor mamm Santez Anna, patronez Breiz-Izel.
— Eienenn a c'hrasou ha skouer a santez,
Dor-zigor d'hor c'halon, klevit gant madelez ;
Ha, daoust ma n'omp ket bet servicherien wirion,
Pedit ho Mab-Bihan da rei d'eomp E bardon.
— Itron gaer ha karet, rozenn visterius,
Roet 'c'h eus ar vuhez da Vari, mamm Jezuz,
Ar Werc'hez dibabet a hed an amzeriou
Da zegas levezeg d'an douar, d'an neñvou.
— C'houi eo gwir batronez an holl dud eureujet
Ha gwir skoazellerez an holl intañvezed,
Skouer ar gwragez santel, teñzor ar vertuziou
Ha, da gement ho ped, eur vamm leun a c'hrasou.
— Gant fiziañs ' kinnigan d'ho karantez santel
Bro an dud kalonek, va bro gaer Breiz-Izel.
Pedit 'vit va broiz hag a zo kristenien
M'o devezo an trec'h war o enebourien.
— Itron Santez Anna, bezit advokadez

Ar bec'herien doaniet ' zeu d'ho pedi bemdez.
Da bennou bras ar vro roit ar c'hras d'hor bleina
Gant lezennou leal, bepred diouz ar gwella,
— Skoazellit, mamm garet, hon tud en armeou,
Astennit ho taouarn a-us d'an emgannou ;
Argasit eus hor bro hon holl enebourien
Ha lakait en hon touez eur feiz kreñv da viken.
— Plijit, mamm vinniget, 'n ho kwarez, kemeret
Ar Pab, Vikel Jezuz, Tad santel ha karet,
An holl gardinaled, ivez an eskibien,
Beleien hon Aotrou, mirourien E lezenn,
— Grit d'ar re ' zo ' vervel, ô Mamm Garantezus,
Kaout eur maro santel, eun tremenvan eürus.
Gras kaer ar vadiziant roit d'an holl vugale
Ha d'ar gwrazez poaniet ar yec'hed dizale.
— O Tad an holl vadou, 'n em lakaomp 'n Ho kwarez
Hag hini ar Santez a zo Mamm d'ar Werc'hhez ;
Pedomp an Dreinded sakr da zont d'hor pardoni
Ma c'hellimp mont eun deiz d'an Neñvou d'He meuli.



GWERZ AR BAZION

— 000 —

(Tennet eus eul levr kantigou moulet er bloaz 1832)

Aelez an Neñv, deuit d'an douar,
Diskennit war Venez Kalvar
Da ober kañvou d'hor Zalver
Pa ne gar ar bed hen ober.

Me ho ped, Mari mamm Jezuz,
C'houi, ivez, Sant Mikael eürus,
Grit d'eomp kaout keuz bras ha glac'har
Da ouela E varo dispar.

Hor c'halon a dlefe ranna
Gant an anken an iskisa
O prederia war E boaniou
Hag o welout E ankeniou?

Sellit, pec'herien, gant truez,
Ouz E zaoulagad divuhez ;
E benn gant ar spenn ' zo treuzet
Hag en E empenn int sanket.

Gwelit E zremm gwadigellet ;
E dreid, E zaouarn ' zo roget
Ha dispennet gant an tachou
'Voe aozet gant ho pec'hedou.

Sellit ouz E gostez toutlet
Hag ouz E gorf er groaz savet ;
Ho kalon ma wel hep keuzia
'Zo graet gant an dir kaleta.

An douar a zeu da grenna
Hag ivez, ar vein da frailha ;
An heol, al loar hag ar stered
A guz o dremm gant ar morc'hed.

Ha c'houi, pec'herien aheurtet,
Ne doc'h na doaniet na chalet
O welout maro ho Roue,
Ho Tad, ho Salver, ho Toue.

Gwasoc'h oc'h eget bourevien,
Gwasoc'h eget ar Juzevien,
Rak, gant keuz bras, darn anezo
'Voe tizet war-lec'h E varo.

Ganto n'oa ket anavezet ;
'Vito e oa eur fals-profed.
Met c'houi hen anav, o pec'her !
Gouzout ' rit ez eo ho Salver.

Dre ho pec'hedou milliget
Ouz ar groaz ez eo bet staget
Ha digeri ' rit a-nevez
E c'houlou : pebez truez.

Mar hoc'h eus 'vitañ karantez
Cheñchit bremañ ho kwall-vuhez
Hag E boaniou kriz ha garo
Neuze kerkent a baouezo.

Grit prim enklask 'n ho koustiañs.
Goulennit pardon gant doujañs
Ha kerzit buan da govez
Gant gwir glac'har ha gant **enkrez**.

Ouz ho nesa, hep kasoni,
Ret eo d'eo'h, ivez, didaeri.
Ar pezh a zo d'ezañ, rentit,
Ha, krenn, ar pec'hed dilezit.

'N eur bedi, 'n eur rei aluzen,
'N eur yun, 'n eur ober pinijenn
E tiboanioc'h ho Tad Jezuz
En E Basion druezus.

Ha c'houi, va Doue, va Salver,
Pa zeuy ar maro d'hor gelver,
Hon degemerit, m'Hoc'h asped,
D'Ho meuli e-mesk an Aeled.



WAR AR FINVEZIOU DIWEZA

Klevit gant souez ha spouron
Ali ar roue Salomon
Skrivit-hen doun en ho spered
Hag e tilezoc'h ar pec'hed
— A greiz-holl mervel a ranker
Ha monet dirak ar Barner
'Vit beza da viken kaset
D'an tan kriz pe d'an eürusted.
— 'Touez an dud ma ren ar pec'hed
Eo ma ne vezont ket chalet
Gant o finvezioù diweza,
Traou kriz hag eus an euzusa.
— Korf an den, hervez an natur,
Ne glask nemet e blijadur ;
Koulskoude emberr, hep arvar,
Ez ay da vreina d'an douar.
— Ar c'horf 'zo meurbed kizidik,
Divenn, lipous ha gwall-semplik.
Goude beza bet re-vaget
E talv da larda ar preñved.
— Ar bed 'zo treitour, kristenien,
Evel war an dour eur bluenn ;
Neb en devo fiziañs ennañ
A vo sur touellet gantañ.
— Da neb 'zo ouz e vez tostik
Hir-vuhez ' ra van da ginnig,
D'ar re-glañv pare dizale,
D'ar re-yac'h nep kleñved morse.
— Arabat ' ve er c'halonou
Ar c'hoant da rastellat madou :

Ar madou pa ' z int dastumet
Ne dint netra nemet moged.
— Ha pa vefec'h, den reuzeudik,
Deut galloudek ha pinvidik,
Petra 'ta ho po gounezet
Pa 'z eoc'h d'an douar 'n eun arched?
— Eur goz liñser ha pemp plankenn,
Dindan ho penn eun tamm torchenn,
Setu ar pezh ' vo d'eoc'h roet
'Vit mont d'an douar da gousket.
— Na fiziit ket war ho yec'hed,
Ho yaouankiz hag ho kened ;
An Ankou didrouz a zizkar
Ar re nerzusa d'an douar.
— N'eus den pinvidik ha desket
Na den ebet uhel-savet
Diskarg eus lezenn ar maro :
Ho falc'hat a ray pa garo.
— Soñjit e vale an Ankou
Tostik bepred ouz ho seuliou.
Ne zaleo ket d'ho kervel ;
Bezit prest atao da vervel.



Kantig Santez Tereza

(Euriou brezonek ha latin an
Ao. ar Briz, beleg. Paj.^o 221)

Peur, va Doue, ' vezo disammet
Va ene diouz ar chadennou
A zo ouz e zerc'hel ken doaniet
Er c'horf-mañ gant kalz a boaniou?
Peur ' vezo ganin-me dilezet
Eur vuhez karget a anken
'Vit mont da vuhez an eürusted
D'Ho kwelout, Aotrou, da viken?

O buhez hir, o buhez poanius
Am eus er bed-mañ da dremen!
Harlu kriz ha meurbed ankenius,
Peur az kwelin-me da dermen?
Peur az kwelin-me oc'h echui,
O bec'h inouus va buhez?
Siouaz! ne ran nemet hirvoudi
War va stadig paour gant truez.

Leun eo ar bed a siou noazus,
Karget eo gant fallagriez;
N'eus ennañ nemet tud fougeüs,
Nemet poan ha tristidigez.

Siouaz! ne ran nemet hirvoudi
Emañ ennañ an den atao
Ha dalc'het, eo 'vel gant eun ere.
E kreiz eur brezel hep arzao!

Prizon ankenius va c'horf douar
A zalc'h va ene ctadennet;
Ennañ emañ atao er glac'har,
Atao en aon, atao nec'het!
Peur e vezi-te 'ta diskaret
Pe dre ar maro digoret,
Ma c'hellin-me va Doue gwelet
Ha nijal d'am bro d'E garet?

O va Jezuz, leun a vadelez,
Plijit ganeoc'h ouzin klevet
Ha va zenna d'Ho rouantelez
Ma vezin ganeoc'h unanet.
Ya! C'houi hepken eo a c'hell gwalc'ha
An holl c'hoantou 'zo em ene.
Ar bed-mañ nemet va heskina
Ne ra pelloc'h e pep doare.

Siouaz! Ennan n'em eus ken dudi,
Ennan n'em eus ken levenez
Nemet o c'houzañv hep damanti
Pep poan hag ivez pep enkreiz.
Evit plijout d'eoc'h-c'houi, va Salver,
Ha diskouez d'eoc'h va c'harantez
Mervel pe gouzañv 'hed va amzer
N'em eus amañ ken bolontez.

Ha, war eun dro, ar mare eürus
An orolaj, pa sko he zaoliou,
'Laka em c'halon levenez
Rak seul-vui e tremen an euriou
E tosta fin va zamm buhez
M'am bo ar c'hras hag an eurvad
Da nijal d'ar Baradoz skedus
Da gaout Doue, mestr hegarat.

O ! Baradoz, palez dudius
Ar Re-salvet hag an Aelez,
Ti hor Salver ken karantezus
Hag E vamm santel, ar Werc'hez,
Pegen lirzin ha pegen laouen
'Pad an holl-amzer ' vezin-me
Oc'h ober, ganto holl, kavandenn !
N'em eus ken hast nemet da-se.

Gant ar c'hoant, va Doue, d'ho kwelet
E kreiz Hoc'h eürusted santel,
Gant ar mennad e vezoc'h meulet
E varvan pa n'hellan mervel.
Va c'hasit ganeoc'h hiviziken
Evit ma c'hellin Ho karet
Hep aon ebet da veza biken,
Mestr, diouzoc'h dispartiet !

Skeudennou ar Sakramant en Testamant koz

3. AN OAN PASK

Ecce Agnus Dei
Ecce qui tollit peccata mundi.

« Setu Oan-Doue. setu an hini a lamm kuit pec'hedou ar bed », Setu komzou Sant Yann Vadezour o tis-kouez Jezuz d'ar Judevien, araok e vadezi e dour ar Yordan. Setu komzou ar beleg, pa sav an Osti sakr dirak an dud, araok rei da gomunia d'ar bobl kristen. Pera ar c'homzou se : « Setu Oan Doue », lavaret diwarbenn Jezuz Krist? abalamour m'eo bet Oan-Pask ar Judevien wechall, eur skeudenn eus Sakramant an aoter, hag end-eeun, eme Sant Tomas Akwino, ar skeudenn dosta d'ar wirionez.

An dro genta ma kaver er Bibl ano diwarbenn an Oan-Pask e oa dalc'het c'hoaz ar Judevien e Bro-Ejipt dindan waskerez ar Faraon ; tost e oant avat da vont ermaez gant Moizez en o fenn. Evit ma vefent lezet da vont, gant ar Faraon, e oe soñj an Aotrou Doue skei ouz Ejiptiz eun taol-reuz diweza.

Hag e lavaras Doue da Voizez :

« Er memes deiz, war-dro serr-noz e vo lazet e pep tiegez, eun oan-bloaz, dinamm. Gant gwad an Oan e vo livet dor al lec'h ma vi debret, evit dizarbenn kounnar ha droukras an Aotrou Doue.

« Debret e vo an Oan gant bara dic'hoell ha glazur e'houero ar parkou. An dud a vo en o sav, eur gouarn

en-dro d'ezo, o botou en o zreid, hag eur penn-baz en o dourn. En noz-se e tremenin war douar an Ejipt ; ha dre lec'h ma tremenin e varvo e pep tiegez an hini hena eus an dud hag al loened, nemet en tiez a welin war o dor, gwad an Oan bet lazeta. »

Evelse e oe graet gant ar Judevien ; evelse e c'hoarvezas. Ha pa oa Ejiptiz o c'harmi war o bugale hag o loened lazeta, e c'hellas pobl Israel mont war raok, ha tremenin en tu-hont d'ar Mor Ruz. Ha pep bloaz, diwar urz an aotrou Doue, e tlee ar Judevien debri an Oan evel o zadou, en eur gouel bras a oa anvet ar Pask, da lavarout eo : AN TREMEN, Doue o tremenin da skei ouz enebourien e bobl, e bobl Israel o tremenin ermaez eus douar an Ejipt, eus douar ar Sklavelez.

Eur skeudenn gaer eus Sakramant an Aoter eo ar Pask hag an Oan.

An doare ma tlee ar Judevien en em gemer evit debri an Oan a verke penaos e tleomp-ni, kristenien, en em gemer evit ober hon Pask, hag evit komunia. Debret e veze an Oan-Pask gant bara dic'hoell ha gant glazur c'houero ar parkou. An daou dra-se a verk evit gwir an ene dibec'h ha glan. Rak ar goell eo an toaz chomet da drenka, hag a vez m'et gant toaz fresk evit hel lakaat da sevel. Ar bara dic'hoell a zo eta an ene lammet diwarnañ loustoni ar pec'hedou gant o c'houez trenk hag hudur. Glazur c'houero ar parkou a verk ivez ar Binijenn, ar gofezion vat a zo blaz c'houero ganti, met a vez eul louzou a ro ar yec'hed d'an ene. Setu perak e lavar d'imp sant Paol « Hon Oan-Pask-ni, diwadet evidomp, eo ar C'hrist. Debromp anezañ, e predi ar gomunion, nann avat gant goell goz hon pec'hedou, met gant bara dic'hoell eur santelez wirion. »

Debret e veze an Oan, a-sav, evel beajourien, o gouriz endro d'ezo, o botou en o zreid, ha penn-baz en o dourn. Evel ar Judevien o kuitaat Bro-Ejipt, bro ar boan hag ar reuz evito, hag o vont da gavout eur vro vat ha pinvidik, ni ivez, kristenien, beajourien o kuitaat an douar-man, bro ar boan hag an drubuilh o vont

war-du ar Baradoz, hor gwir-vro, e tleomp beza a-sav, eur gouriz en dro d'imp, eur penn-baz en hon dourn, ar botou en hon treid, evit gallout bale gant Jezuz. Dalc'homp soñj n'omp amañ nemet beajourien o tremenin ; soñjomp alies er Baradoz, hon gwir vro. Bezomp war evez da virout hon c'halon distag diouz an dud hag an traou. Eur botou mat en hon treid, evit bale seder war-du ar Baradoz hep kaout klogir na kaledennou. Hep komunion, ne rafemp nemet ruza war hent Doue. Ne vefe ket en hon dourn penn-baz, an nerz evit derc'hel start ha dispart da vont war raok bepred. An diaoul avat a goll e nerz dirak eun den maget gant an Oan-Doue ; ne gouezo ket eur seurt den er pechou itriket gant an ael du. « Ar re, eme Sant Yann Genou-aour, amañ war o ene gwad Jezuz, a laka an Diaoul da souza gant ar spont. »

Gwad an Oan a veze livet gantañ dor an ti, evit dizarbenn kounnar an Aotrou Doue a dlee tremenin evit kastiza Bro Ejipt. Ar re a zo ganto sin Jezuz Krist merket en o ene, sin ar c'hras a zo roet d'imp gant gwad hon Salver, ar re-se ne gouezo ket warno kastiz an aotrou Doue, an deiz ar Varn. Diwallet e vezint pa vo skoet ouz ar re all. Tremenin a raio an Aotrou Doue evit kas ermaez eus banvez ar Baradoz an hini n'en devo ket gantan gwiskamant glan ha dinamm ar santelez. Teurel a raio anezañ e bro an tan hag ar skrign dent. Ar re avat o devezo merk an Oan a vo degemeret : tremenin a raint eus an douar, lec'h ma ren an diaoul hag an dud fall evel ar Faraon hag an Ejiptiz a vac'he gwechall ar Judevien, evit kavout ar vro prometet gant an aotrou Doue d'e servijerien.

Evel an Oan Pask, evit ar Judevien, en deus sakrifiz Jezuz Krist digoret d'imp hent ar silvidigez. Lazeta eo bet evidomp an Oan-Doue war ar Groaz evit hon lakaat barrek da dremen eus douar ar pec'hed betek etre divrec'h hon Tad a zo en Neñv. Sakrifiz Jezuz Krist a zo hon Pask, da lavarout eo hon tremenin, hon treiz war-du ar Baradoz.

Bep sul, gant an oferenn e vez adc'hraet war an aoter ar Sakrifiz santel-se, evidomp, evit ma vo kinniget lamm kuit pec'hedou ar bed. Renet gant Jezuz Krist evel gwechall ar Judevien gant Moizez, tremenomp ganimp d'an aotrou Doue, evit ma tebrimp an Oan a tañ davet hon gwir vro, tremenomp d'e heul, rak pep gwech ma vez lidet an oferenn ez eo hon Pask a zo lidet hon tremen, hon treiz war-du Doue.



Hag al lennegez kristen e Bro-C'hall ?

N'eo ket bet gwall-stank e lennegez Bro C'hall, a-baoe an Azginivelez (la Renaissance), ar skridou hag a verv enno eur soñj kristen beo. E-pad an XVII^{vet} kantvet zoken, daoust d'ar skrivagnerien a vicher beza katoliked anezo, n'o deus ket silet en o oberou ar feiz a oa koulskoude o hini. En soñj e oa an trec'h gant ar marvailherez pagan (le merveilleux païen, evel ma lavarent) Eun disparti a lakaent etre ar relijion hag al lennegez, etre ar gredenn hag o buhez-den.

Rak oberou Pascal, re Bossuet, n'int ket a-ratoz kaer oberennou-lennegez. Ha Racine pa skriv Esther hag Athalie ne labour ken nemet dre urz ; ne oant ket oberennou da veza embannet ; marteze e chome bepred en e spered ar gaou-mañ, ne oa gwir lennegez nemet an hini digristen. Hag ar varzoniez katolik en amzer-se ? Ne gaver nemet traou disliou ha yen, traou paour.

Ha koulskoude n'en doa ket manket d'ar spered kristen a-benn neuze, nerz da entana oberennou dispar. Daoust ha n'en doa ket Dante en Italia, savet e « Divina Comedia », e « C'hoariva doueel ». Ha keit-se, daoust ha ne plede ket e Bro-Saoz ar protestant Milton war e « Baradoz Kollet ». Hag e Bro-Spagn, daoust ha ne oa ket bet, daoust ha ne oa ket bepred er XVII^{vet} kantved, katolik a-grenn al lennegez, skrivet gant sent, gant beleien, gant menec'h, barzonegou, romantou, peziou-c'hoari, ken buhezek ha kristen.

E Bro-C'hall n'eo dihunet ar spered kristen el lennegezh nemet e-pad an XIX^{vet} kantved. Ha da genta, ez eo chomet gwall-vesket an traou gant ar Romantiked. Nemet a-benn ar fin ez eas war wellaat. Unan eus ar re o deus stourmet ar muia nevez 'zo, evit adsevel eul lennegezh kristen e Bro-C'hall, eo Charlez Peguy, maro e-pad ar brezel diweza, hag en deus lezet skridou talvoudus e gwirionez. Setu amañ troet e brezoneg gant Farnachanavan, unan eus e varzonegou brudeta « Présentation de la Beauce à Notre Dame de Chartres », « Kinnig Bro-Velez da Itron Varia Chartr », a roomp amañ war-lerc'h lodennoù anezan.

KINNIG BRO-VELEZ DA ITRON VARIA CHARTR

Steredenn ar mor bras, sed an doubier pouner,
Hag an houlennoù doun ha mor doun an edou,
Hag an eon fiñvus hag hor solierou leun,
Setu ho sell, Itron, war ar vro divent-mañ.

Ha setu c'hoaz ho mouez war ar gompezenn-mañ,
Hor mignoned diank, hor c'halonou dibobl,
Setu a-hed hor c'horf hon arzournou distag
Hag hor skuizder divent hag hon nerz en e bez.

Steredenn ar mintin, Rouanez dreist hon tiz,
Setu ma kerzomp-ni war-du ho lez illur,
Ha setu kompezenn hor paour kaez karantez,
Ha setu mor divent hor glac'har dizivez.

Eun difronk o kantren a red war an dremwel.
A vec'h daou pe dri di evel eun enezeg.
Eus lein ar c'hloc'hdi koz e kouez evel eur glav ;
Heñvel eo an iliz ouz eun tiig izel.

Ganet ez omp 'vidoc'h war ribl ar blaenenn-mañ
E kildroenn divent hol Liger melenik,
Hag ar stêr trezek-mañ hag ar stêr klodus-mañ
Ne red 'met 'vit pokat d'ho mantell enorus.

Ganet ez omp war ribl ar gompezenn vras-mañ
E Kêr goz Orleañs, dic'hoarz ha trist-kenañ,
Al Liger o redek lec'hidek alies
Ne red 'met 'vit gwalc'hi troad an dorosenn-mañ.

Ganet ez omp war ribl ho pro-Velez kompez.
Anavezet hon eus en hon Yaouankiz flamm
Dor-dal ar vereuri hag ar gouerien galet
Hag ar c'hloz 'barz ar viurc'h hag ar bal hag ar foz.

Ganet ez omp war ribl ho Pro-Velez kompez.
Anavezet hon eus, 'dal hor c'henta keuziou
Pet dic'hoanag kuzet a c'hell beza e-barz
Eun heol hag a ziskenn en eun oabl ruz-tan

A ya da guz a-rez d'eun douar didec'hus
Kalet 'vel eur reizder, eeun 'vel eur varrenn,
Reiz evel eul lezenn, ha kloz evel eur poull,
Digor 'vel eur sichenn ha plaen evel eun daol.

Eun den eus hor bro-ni, eus ar glad frouezus
Hag eus eun eienenn gant eun taol-doug hepken
Hag eus eun eienenn ganteun taol-doug hepken
War-du ho klad en neñv, ar bir dispar er bed

Tour ar Roue David, sed ho tour belezat,
Ar penn-ed kaleta a ve savet biskoaz
Etrezek an oabl kuñv ha leun a sioulder
Hag ar fleurenn vrava e-barz ho kurunenn.

Eun den eus hor bro-ni 'n deus lakaet da strinka,
Adal rez an douar betek sichenn ho kroaz
Uheloc'h 'get ar sent hag an holl rouanez
Ar beg-tour direbech ha ne c'hell ket koueza.

Hennez eo ar penn-ed na varvo birviken ;
'N hini na weñvo ket dindan heol gwengolo,
'N hini na revo ket 'pad miziou du ar goañv,
Ho kwella servijer hag ho test feala.

FARNACHANAVAN



A-DREUZ LENN.

ASSOCIATION BRETONNE renta-kont eus he
bodadeg e Dinan, mezeven 1937, moulet e Sant-Brieg,
Prudhomme, 1937.

Eur souezadenn eo bet marteze da veur a hini evel
d'ar c'henlabourer, eun istorour anezañ, en deus dega-
set dimp ar pennad-mañ war-lerc'h, lenn e niverenn di-
weza an « Association bretonne », studiadenn ROGER
VERCEL, o kinnig dicaok da Vretoned brogar, skouer
GWESKLEN (Du Guesclin) da veza heuilhet ganto.
Setu amañ barnet an eil hag egile.

« Er pevarzekvet kantved, e oa eur Skosad, Roparz
Bruce, o vrezeli da heul ar Saizon a-enep Skosiz. Gou-
de an emgann ez azezas ouz taol hep beza gwalc'het e
zaouarn, ruz gant gwad ar re doa taget. An aotrounez
Saoz a lavare an eil d'egile en eur c'hoarzin goap :

— Sellit ar Skosad-se o tebri e wad e-unan.

Bruce a glevas, hag en em sonjas. Sur-mat e c'hel-
le ar gwad-se beza anvet E wad, peogwir e oa gwad E
genvroiz kalonek o stourm evit frankiz E vro, e-pad
ma oa-heñ war heul o enebourien, a rae c'hoaz ouspenn
goap outañ. Ken glac'haret e voe kement a euzas outan
e-unan, ken e savas diouz taol, en em guzas en eur
chapel da c'houlenn pardon digant Doue evit e dorfed,
hag e reas le da dremen e holl vuhez o tishual e vro.

Nebeut amzer goude, e oa Bro-Skos dishual ha Ro-
parz Bruce anvet da Roue.

War-dro an amzer-se ivez, e oa ar breizad Gwesklen e penn armeou Bro-C'hall. Duk Breiz, Yann IV, bet savet e Bro-Saoz hag harpet gant ar Saozon enep Charlez Bleiz hag ar C'hallaoued, a vire evit ar Saozon ar c'hargou hag an enoriou. Ranket en doa tec'hout da Vro-Saoz dirak kounnar Breiziz.

Roue Bro-C'hall a sonjas e oa deuet ar mare da lakaat e graban war Vreiz, hg e fiskerias (18 a viz kerdu 1378) e oa hiviziken ar vro dindan e zoamani

« Kredi a rae en dije hep stourm Breiz ha Breiziz, evit o zouza evel deñved... ken vil e oant deuet, ken goullet, ken mac'hagnet (1), darn a oa bornet, darn a oa moñs. O c'hroc'hen a oa deuet evel plusk-gwez, o dilhad e pilhou, o c'hezeg maro, o madou kollet; tizet e oant bet holl, met diouz araok muioc'h eget diouz adreñv peurvuia. En-enep, ar C'hallaoued a oa kribet mat, o c'hroc'hen a oa flour ha tano, o baro trouc'het giz eur forc'h. Dispar e oant da zañzal kana a raent evel morwraze... koant ha lijer e oant. Met Breiziz a euze dirak ar veveliez, pa welent penaos e rene e Bro-C'hall. Gwelloc'h e oa d'ezo mervel er brezel eget mont da vevelien, int hag o bro, hag o bugale war o lerc'h ». (Chronique du bon roi Jehan).

Roue Bro-C'hall, Charlez V, a roas urz da Wesklen d'ober da Vreiziz plega (1379). Met ar re-mañ en em savas a-unan. Intanvez Charlez Bleiz, Janed Benteur, hi hec'h-unan, a skrivas da roue Bro-C'hall e oa an dukelezh eur brinselez en he frankiz (libre principauté). Hemañ ne selaouas ket. Neuze e skrivas-hi d'an dud Yann IV, distrei raktal da zifenn ar vro. Yann V a zistroas, hag e voe degemeret e Dinarz gant youc'h ha levenez (3 a viz eost 1379).

Gwesklen kouskoulde, « prenet gant aour an enebou-rien » (Chronicon Briocense). « dallet gant profou ar Roue » (Gwilherm Sant Andreo). « oa o tont d'ober brezel d'e vro. Met an holl Vreiziz a oa e lez ar roue, dec'has diwar e dro. (Gwilherm Sant Andreo). Mezus ha digalonekaet, e skrivas d'ar roue n'helle ken e erer nijal (eun erer du a oa war e skoued), kollet gantan e bluñv, hag ar Roue « o c'houzout pegen unanet, pegen

pennek, ha pegen dispont e oa Breiziz a savas keuz enañ hag aon na zegouezje gwasoc'h c'hoaz gantañ hag e rouantelez » (Chronicon Briocense), hag a gijas (here 1379).

Gwesklen a varvas nebeut goude. Gant ar C'hallaoued eo bet beziet da heul ar rouaned en iliz Sant Denez. E Breiz avat, keit ha ma 'z eus bet eur Vreiz (betek 1789 — er bloaz-mañ e vo 150 vloaz), biskoaz Breujou-Breiz n'o deus pleget da lakaat skeudenn Gwesklenn en o sal.

Eur souez eo bet d'in lenn e niverenn-vloaz an « Association Bretonne » prezegenn Roger Vercel. Roger Vercel a zo en « Académie de Bretagne », evel just, peogwir eo bet krouet gantañ hag e vignoned. Roger Vercel a oa o ren e Dinan bodadeg an « Association Bretonne », e 1937. Ha kement-mañ zo souezusoc'h soueza, rak ne gav ket d'in e vefe breizad. Roger Vercel en deus graet meuleudi Gwesklen, tra ziaes a-walc'h marteze, evit eun den ha ne oar ober nemet romantou gall, dirak tud hag a oar istor Breiz. Deuet eo brao a-benn koulskoude. Gwesklen e oa ret d'ezañ ober brezel d'e vro, rak :

1) Ar Fremeur, stêr Brohoñs, a red etrezek ar reter, gomprenet ket eo suroc'h beza a-du gant ar c'hreñva ha druoc'h beza a-du gant ar pinvidika.

2) Muioc'h a spered en doa eget ar Vreiziz all, na hag er reter emañ Bro-C'hall.

An « Association bretonne » a zo bet savet evit mirout ar pezh eus Breiz, n'eo ket bet c'hoaz peurvruzunet. Ano Breiz a zo bet diverket 150 vloaz 'zo ; he yez' e-meur o klask mouga, he zud a denner d'ar c'hèriou bras ; hec'h istor, da vihana, a chomo evel m'emañ, peogwir eo eun dra dremenet? Ne raio ket. An hini n'eo bet biskoaz anvet e Breiz nemet treitour ha trubard a zo bet anvet den meur ha den speredek, n'eo ket abalamour en deus sikouret Bro-C'hall enep ar Saozon, met abalamour m'en deus gwerset e vro! An Association bretonne » he deus klevet kement-se hag hen moulet en e niverenn renta-kont hep eur ger a rebech !

WAR DU AR PAL

Diouyezek eo « WAR DU AR PAL », gant muioc'h a benadou e galleg. Eur roll-labour bras he deus lodennet d'ezhi ha sur omp e vo frouezus he skriv. En niverenn diweza, menegomp el lodenn vrezonek, eur gontadenn gant Yeun ar Go, « Sinadou », hag eur stobad geriou kernevek dastumet gant an hevelep hini, a zo talvoudus-tre al lodenn vrasa anezi. Eur yez pinvidik eo hini Bro-Bleiben ha n'hellomp nemet rei meuleudi da Yeun ar Gô evit an doare ma ra ganti, o lakaat da dremen er yez unvan troidou-lavar dianav a-walc'h d'ar re n'o deus ket an eurvad da veza ganet er Menezio Du.

MARC'HEGER AR GERGOAD

Darn eus hor c'henvroiz hag a anavez danvez al levr o deus goulennet ma vije moulet eun nebeut skoueren-nou anezañ war baper kaer.

Sevenet e vo o goulenn.

Alia a reomp start an holl Vretoned hag a gar ar brezoneg da rei o skoazell da « Vreuriez ar Brezoneg er Skoliou » en eur brena dioustu « Marc'heger ar Gergoad ». N'o devezo ket lec'h da gaout keuz rak n'eo ket hanter-kant pajenn eo a vo el levr, evel ma oa bet lavaret dre fazi, met kant pajenn pe war-dro..

Plijout a ray d'an holl ar gontadenn vurzudus hag ar skeudennou dispar a zo bet savet gant E. ar Gelleg evit he bravaat.

io lur e vo priz al levr moulet war baper brao. Ne gousto nemet 20 real war baper disteroc'h (ar mizou-kas ouspenn).

Pedi a reomp ar re a c'hello rei eun draig bennak dreist priz al levr da gas o aluzenn ar c'henta 'r gwella. Talvezont a ray da greski niver ar prizioù a vo roet da vugale hor skoliou.

Skriva ha kas an arc'hant da : Yves Le Goff, route de Croaz-Toull, Gouézec, K.R. 22.054-Roazon.

Notenn : Al levr a zo embannet breman

ROLL AR GERIOU DIAES

Arvesti ouz, verb : contempler
Annezad - idi, gourel : habitant
Bual - ed, gour. : buffle
Kan-emrespont, gour. : répons (de l'office divin)
Kavandenn : darempred
Kehela, verb : révéler
Kenwerz, gour. : commerce
Kildroenn - ou, gwregel : sinuosité
Klod - ou, gour. : gloire ; Klodus : glorieux
Kontron - enn, ano-stroll : preñved ar c'hig brein
Kounaat : kaout soñj eus
Divellet : déboité (en parlant des articulations)
Divenn : inconstant
Diziwez : sans fin
Eienn - enn, ano-stroll : source
Enezeg - ou, gwregel : archipel
Feal : loyal
Forta, verb : verser par dessus bords
Glad, gour. : terre fortune
Gourin - ou, gour. : linteau de porte ou de fenêtre
Gouriz - ou, gour. : ceinture
Hanaf - ou, gour. : vase à boire, coupe
Harlu, gour. : exil
Illur : illustre
Laz-kana, lazou-kana, gour. : chœur de chanteurs
Lida : célébrer
Liger : la Loire
Meurded, gwregel : majesté

Mesiazel : messianique
 Mezek : honteux ; Mezekaet : confondu de honte
 Pompadus : pompeux
 Santelva - ou, gour : lec'h santel
 Seveni : accomplir quelque chose (à distinguer de se-
 venaat, civiliser)
 Stern-aoter, gour : rétable
 Stervarnour - ien : exégète (ster sens d'un mot)
 Teurvezout : daigner
 Toneg - ou, gwregel : tunique

RESPONT D'AR GERIOU-KROAZ Niv. 3

Eur fazi a zo bet graet e testenn ar goulennou. Ar
 goulennou 5 ha 6 a-led, a zo da veza 6 ha 7. Evit al li-
 nenn 5 ar goulennou a oa ar re-mañ. Gourfennger ano-
 gwan - sonenn - sonenn.

A-led 1. Krap - Es	A-serz 1. Klopennn
2. Laza - Ik	2. Ra - Ilio
3. O - P - Lo	5. A - Re
4. Piarais	3. Az - A
5. E - A - E	4. Padraig
7. Nc - Genn	6. Eili - In
	7. Skosenn.



D'HOL LENNERIEN

An niverenn-man a oa bet grêt evit beza embannet e di-
 benn miz eest. Ar brezel a deuas, he renerien a oa galvet
 dindan an armou, ha STUDI HAG OBER a jomas diembann.

Pedi a reomp hol lennerien da zegemer gant ma-
 delez an niverenn-man. N'he deus gallet beza kaset
 da benn nemet gant dilerc'h ha poan. War an eil
 hag egile, karantez Doue ha karantez Breiz o deus
 trec'het... hag a drec'ho !



C'houi Tadou ar vro,
C'houi Sent koz holl doujet
Roit d'eomp nerz
E kreiz hon anken,
Gwarantit Breiz
Da virviken.

Y.-B. Calloc'h.



Ar merour Y. P. Nedeleg
Moulerez **Bro-Leon**, ru Lafayette, Landerno.